

HC_0002_AR MILINERIG FIN

ton bale

‘n ur vonet da bourmen,
digatedig
E-barzh ur c’hoad sapin,
ge
E-barzh ur c’hoad sapin
M’en en gavas ganeomp-ni
Ye, digedig, tamm tra, digedid turi i yé
M’en em gavas ganeomp-ni ur milinerig fin.

En em gavas ganeomp
ur milinerig fin
Na ma c’hasas gantañ
da leinañ da vilin.

Na ma c’hasas gantañ
da leinañ da vilin
Na da zib’iñ ur c’hampou’zh
da ev’ ur banne gwin.

Krampou’zh pa oant debret
ar gwin pa oa evet
Nag ar martolod yaouank
a felle d’añ kousket.

Da gousk ganit n’in ket,
digatedig
Kar ma mamm a ouifet
ge
Kar ma zad a glevfe a vefen oc’h ober al lez
Ye, digedig, tamm tra, digedid turi i yé
d’un den hep kalite.

Kar ma mamm a ouife
‘vefen ober barlennig gant un den hep kalite
ar peizant d’ober gwastell ar rouaned
o ya hennezh marteze martezez a c’hallfe
pe ar martolod yaouank ‘tistrein eus an arme
o ya hennez dre sur vat a gouskfe ganin-me

kanet gant Pierre Fer ha Marcel Gars dastumet gant René-Yves Creston e Scrignac, 14/09/1949 pladenn doubl ha levrig
Dastum, Pays Montagne war www.dastumedia.bzh : fich. 51110125.mp3